



## Emvod-Meur ar Redadeg

Danevelloù buhezel hag obererezh

2016-2017

– Rapports moral et d'activité

### Lodenn 1 : 2017 Ar bloaz tremenet

#### gant Jerald ar Gov – ken prezidant

Opala, tudoù kaer ! Arru eo ar c'hourz da zigorñ ho tiskouarn hag ho taoulagad. **Bremañ**, tudoù kaer, **bremañ** e kroga ar prantad a c'hortozit get hiraezh a-c'houde ur blez : hini prezegennoù an daou genprezidant !

*Bonjour à tous, voici venu le temps tant attendu des rapports moraux et d'activité de vos deux coprésidents préférés !*

Sañset, ma vehe doujet doc'h reolennoù uhel monet en-dro ur gevredigezh desavet él ma faota, e vehe bet d'hor C'Henprezidantez Meur da grogiñ aze. Doc'h an tu arall e laka un elfenn arall, an oad, ac'hanin da gomañs, sañset, hervez ar mem reolennoù. Ha c'hoazh, nend eo ket ker anat-se an diforc'h, pa vez sellet a-dost. Neuze, perak e vez kroget an danevell-mañ genin ? Evit monet a-enep, evit ur wezh, da reolennoù hor yezh. Bah ya, aze, ne vo ket lakaet ar pouezusañ da gentañ, él ma vez graet get Yann brezhonegour pa zistripa e vrezhoneg vravañ, mes ar c'hontrel an hini eo a vo graet : er fin e vo klevet genoc'h ar vravañ danevell n'ho peus ket klevet biskoazh, distaget ker brav get kenprezidantez yaouankañ ha plijusañ ar Redadeg.

*Les règles de la politesse se disputent l'ordre de passage de l'un ou l'autre, nous privilégierons pour une fois l'âge à la beauté et romprons avec les règles de grammaire de notre belle langue qui place le plus important en premier. Je commencerai donc. Leila vous présentera les projets de l'année à venir.*

Gellet a rit kemer ho hezoug en-dro neuze, peotramant monet da evet un tasad kafe, razh a pezh a vo lâret genin ho peus bevet dija. Ya, c'hwi, tudoù kaer, implijidi ar Redadeg, izili ar burev, izili ar C'huzul-Meriñ, izili ar Redadeg, tud a youl-vat ho peus bevet pe, d'an nebeutañ heuliet a-dost, ar blezad un tamm ispisial-mañ, blezad tremen d'ur Redadeg d'an arall. Tremenet eo. Ah, a-benn ar fin em eus kavet aze en-dro danvez an danevell-mañ !

*Vous pouvez donc allez vous promener car je ne vous parlerai que de l'année passée, cette année particulière qui passe d'une Redadeg à une autre, j'y ai trouvé matière à cette présentation.*

Daomp 'ta. Tremenet eo. N'hon eus ket kollet amzer atav.

Àr greñvaat eo bet ar Redadeg ar blez tremenet-mañ.

Niverusoc'h eo daet da vout ar C'huzul-Meriñ : div wezh muioc'h a dud o deus bet ar boneur da gemer perzh ennañ ! Soludoc'h, frouezhusoc'h, pinvidikoc'h, efedusoc'h eo bremañ ar bodad a vera ar Redadeg. Diouer a labour n'en deus ket bet atav.

*Nous n'avons pas chomé cette année et l'association s'est renforcée, le conseil d'aministration a deux fois plus de membres. Nous sommes aujourd'hui plus forts, plus efficaces, plus riches et plus créatifs pour gérer la Redadeg.*

Getañ eo bet renevezet diazezoù hor c'hevredigezh : kempennet ha gwellaet eo bet statudoù ha reoleneg diabarzh ar Redadeg. Marse n'eo ket bet lodenn blijusañ kargoù kentañ ar C'huzul-Meriñ nevez dilennet, mes sur a-set unan ag ar re bouezusañ a zo bet kaset da benn getañ ar blez-mañ. Cheñchet ar statudoù ha kempennet ar reoleneg diabarzh a oa poent gober evit lakaat anezhe da glotiñ muioc'h get emdroadur ar gevredigezh a-c'houde he fenn-kentañ ha get he monet en-dro a-vremañ.

*Nous avons revu et actualisé les bases de l'association en améliorant les statuts et le règlement intérieur. Ce n'était peut-être pas le plus agréable à faire pour le nouveau CA mais c'était bien le plus important pour le fonctionnement futur.*

Evit kas ar labour da benn en un doare efedusoc'h eo bet ijinet meur a feson da genlabourat en tolpadou miziek. Soñjoù Katell o deus lakaet pep unan ac'hanomp da zibegiñ doc'h hor c'hadoerioù evit monet da gejiñ doc'h ar re arall ha breinstormingiñ, diviz, eskemm, krouiñ asambli. Tolpadou perzhiiñ a vez graet ag an dra-se, ha perzh en deus kemeret pep unan ac'hanomp !

*Cette année nous avons testé de nouvelles manières plus participatives de fonctionner dans les groupes de travail régulier et ces réunions ont été très fructueuses, permettant à chacun de prendre part et de faire des propositions.*

Kreñvaet ar skipailh tud a youl-vat neuze. Kreñvaet hini ar gopridi. Er liester eo ret deomp implij ar ger-se bremañ. Divizet en doa ar C'huzul-Meriñ krouiñ un eil post gouestlet d'ar c'hehentiñ ha da zieren ar Redadeg àr-zu ar vesened hag an embregezhioù, tachenn treut a-walc'h siwazh betek bremañ. Embannet ar post-se àr ar rouedadoù sokial, él ma lârer evit seblantiñ bout yaouank, ha setu degouezhet un dek kannig bennak. Goude un enklask frouezhus eo bet kavet genomp ar berlezenn. Un eil c'hopradez a zo bet implijet get ar Redadeg neuze, edan ur gevrad didermen, sikouret get ar Rannvro : Tifenn an hini eo.

*L'équipe des bénévoles s'est étoffée, celle des salariées également. Le conseil d'administration a décidé de créer un second poste, plus particulièrement dédié à la communication et au développement afin d'améliorer notre action auprès des partenaires et mécènes. Nous avons proposé un poste plein temps en CDI (aidé par la Région Bretagne), vu une dizaine de candidats et trouvé notre perle rare en la personne de Tifenn.*

A-drugarez dezhi, da Tifenn, ha da Katelin ivez él-rezon, e vez nevesaet hon doare da labourat. Tremen a raomp tamm-ha-tamm d'ar grennamzer d'an amzer a-vremañ. Achu ar prantad kejiñ get an dud dre lizher, c'hoazh gwashoc'h, dre vinitel (*Displegadenn dre ret evit hor bugale : ur seurt internet ijinet da gourz an dinaozored, àrnezhañ kavet ar « 3615Redadeg », e galleg flour, get re goshañ hor c'hevredigezh*). Kroget omp razh da c'hoari get ar c'hlood, ar padlet, ar framadate, ar framacalc, ar framatruk pe ar framachin. Ur gevredigezh a-vremañ eo ar Redadeg a implij ar binvioù a-vremañ evit kas àr-raok ar brezhoneg... a-vremañ.

*Nous avons aussi renouvelé nos outils de travail en ligne et hors google, passé du moyen âge à notre époque moderne avec des ... cloud et frama de toutes sortes.*

Àr un ton brasoc'h-brasañ omp bet er prantad tremenet-se ivez. Get lid ar chekennoù eo bet uhelaet ar live d'un taol. Hag un taol kaer a zo bet aozet evit roiñ en-dro an argant dastumet dre gwerzh kilometroù ar Redadeg tremenet : pep unan en deus gallet diskouez ha displegiñ e raktres da pasabl a dud o doa bet ar soñj vat da zonet betek sal ar c'hoc'hu e Karaez. Hag ur leurenn, mar plij genoc'h, da zegemer dougerion ar raktresoù él ma faota, dezhe d'hon trugarekaat ha da achap get ur chekenn vrav.

*Lors de la remise des chèques pour les projets 2016 nous avons organisé un événement festif qui a permis de présenter et valoriser les projets plus anciens qui ont aboutis et de découvrir plus avant les futurs projets 2016.*

Dioren ar Redadeg a chom hor pal, dioren an darvoud evit brudiñ ha kas àr-raok muioc'h-mui hor yezh. Ur feson nevez d'en ober a zo bet ganet e penn Mathieu ar blez-mañ.

Kinniget ar soñj deomp ha lakaet ar gaoz àr ar machin-nevez-se en tolpadou miziek. Frouezhus, él bep taol, eo bet an disoc'h : lañset eo ar Redadeg... kulturel... pe sevenadurel ? Mat, chom a ra an anv da dermeniñ c'hoazh. Tabutoù da zonet, fiskal, él bepred !

*Le développement reste notre objectif et le mot clé : développer la Redadeg pour promouvoir et permettre le développement de la pratique de notre langue. Un nouveau concept nous a été proposé et commence à se façonner, il s'agit de la Redadeg Culturelle dont nous reparlerons certainement. Nous nous préparons des discussions savoureuses. Super !*

Just a-walc'h, #fiskal : spered ar Redadeg, setu un dra n'eo ket bet kollet. A-c'houde ar penn-kentañ eh eus un dra burzhudus arall, ha nend eo ket bet kaoz kement-se arnezhi àr un ton dereat, en hor c'hevredigezh : ur SPERED. Ya, ur SPERED. Mall-bras eo hiriv lakaat àr-wel ar SPERED. SPERED ar Redadeg. N'eo ket an hini a vevomp bep eil blez e-pad ur c'hilometr, meur a unan pe mem ur sizhuniad evit lod. Hennezh a zo bet kaoz àrnezhañ dija get meur a dud. Nann, aze e faota din lakaat àr-well, lidiñ ha mem roiñ meuleudioù da Spered skipailh kreiz ar Redadeg, da lâret eo ar burev, ar C'huzul-Meriñ hag an izili a striva bep miz evit kemer perzh en tolpadou. Ya, trugarez vras deoc'h, tudoù kaer, da vout dalc'het get ar spered diwanet get e grouerion : Jean-Michel ha Katelin. Plijadur da gentañ, ger-stur ar Redadeg, mes hini an tolpadou kreiz ivez. Plijadur d'en em welet ur wezh ar miz d'an nebeutañ, plijadur da gejiñ doc'h pep unan ac'hanoc'h, plijadur da ziviz, da dabatal, da brofiteñ doc'h ho soñjoù dibar, plijadur da farsal ha plijadur da c'hoarziñ, plijadur da genlabourat en un aergelc'h a gengred ha doujañs, positivel ha seder, plijadur, erfin, d'ho kuitaat bep taol get ar soñj hon eus graet hor seizh gwellañ ur wezh c'hoazh evit kas da benn ar Redadeg ha kas àr-raok ar brezhoneg.

*Justement #fiskal #super : l'esprit de la Redadeg, voilà quelque chose qui n'est pas perdu. Depuis le début il y a une espèce de miracle qu'on n'évoque jamais, il s'agit d'un esprit, état d'esprit si vous voulez. Celui dans lequel nous travaillons, nous n'en parlons pas souvent et pourtant il est bon de le souligner. Oui, il y a un « état d'esprit » dans notre association. Ce n'est pas celui que nous vivons tous les deux ans sur un km ou plus ou même sur une semaine pour certains. Celui-là a été souvent évoqué par de nombreuses personnes. Non celui dont j'ai envie de parler et de valoriser c'est l'esprit, l'état d'esprit global de tous les membres de l'équipe qui se retrouvent dans ces réunions régulières, conseil d'administration ou Skipailh kreiz. Merci à vous tous d'avoir conservé et fait vivre le bon esprit de travail et de collaboration qui a été planté par les créateurs de l'événement. Plijadur, plaisir d'abord, le slogan de notre course, mais aussi de nos réunions. Plaisir de se voir au moins une fois par mois, plaisir de rencontrer chacun de vous, plaisir d'échanger, de discuter, de profiter de la créativité de chacun, plaisir de plaisanter et de rire, de collaborer dans une ambiance respectueuse, positive et sereine, plaisir enfin de quitter la réunion chaque fois avec le sentiment qu'on a fait tous de notre mieux pour faire avancer notre projet et pour la langue bretonne.*

Arg, setu lan ma c'halon a levez. Ha pa za ar joa enni, e ta c'hoant da ma mouezh ezteurel ur ganenn ag ar re vravañ... MES, ne rit ket bil, dre chañs e para bep taol ma spered ha ma divskouarn doc'h ma mouezh da ganal an nebeutañ tra. Neuze, get truez doc'h ho tiskouarn, e chomin hep dibuniñ kanenn ofisiel ar Redadeg choajet nend eo ket pell 'zo get muioc'h evit 3400 den dre internet. Laoskel a rin ma c'henseurtez en gober doc'htu, ma faot dezhi.

Titl ar ganenn a implijan aze ur seurt evit ho kouviñ da vonet assembl... betek an trec'h !

*Et me voilà tout empli de joie, tellement que ca me donne envie de chanter, tiens...bon d'accord non je vais m'abstenir... d'entonner la nouvelle chanson officielle qui a été choisie par le vote de plus de 3400 personnes sur Internet ! Je laisse le soi à ma co-présidente de le faire ! Avec un titre qui nous invite à aller de l'avant tous ensemble... betek an trec'h, jusqu'à la victoire !*

## Lodenn 2 : 2018 an dazont

### gant Leila Simon – ken prezidantez

Eürusamant n'ho peus ket heuliet kuzulioù Jerald, sur on eo chomet digor ho tivskouarn ha gwelet a ran n'oc'h ket aet da evañ banneoù kafe, ha gwell ha se, rak mat eo atav hag a-bouez zoken da holl izili Ar Redadeg gouzout dre ar munud diwar benn al labour graet e-pad ar bloavezh.

*Heureusement que vous n'avez pas suivi les conseils de Jerald et que vous êtes restés là à écouter car c'est important pour chacun de se retourner sur le travail mené à bien.*

Disammet omp o klevet ne gano ket Jerald, ha dre chañs, me kennebeut.

*On est content aussi que Jerald ne chante pas et moi non plus d'ailleurs !*

Mersi bras deoc'h ha dit te Jerald, awenet brav out bet o skrivañ da damm pennad truk, 'vel ma lavarez ha kaer eo deuet ganit.

Ne c'hellan ket lavarout e vo va zamm truk din me, ken awenet ha brav ha da hini Jerald...

Met hiziv, deoc'h c'hwi da c'houzout ez eo ar wech kentañ din dibunañ va frezegenn dirak an dud.

Abaoe ur bloaz hepken emañ e skipailh Ar Redadeg.

*Je ne sais pas si j'aurais autant de talent que Jerald pour vous présenter les projets de notre association pour 2018, c'est la première fois que je me plie à l'exercice et je ne suis arrivée que depuis un an dans l'équipe de la Redadeg.*

Tremenet eo bet buan ar bloaz, ha karget mat, darvoudoù plijus ha lod all dispiljusoc'h, evel ar pezh emañ me oc'h ober bremañ, diouzhtu, dirazoc'h...

Redadeg 2018 a zo o tont, a benn 7 miz, dija, ha kalz labour a chom d'ober a-raok sizhunvezh Ar Redadeg. Ret eo lakaat pep tra e plas e keñver al lojistik.

*L'année est passée vite et a été bien chargée... l'organisation de la Redadeg 2018 a commencé depuis 7 mois déjà et il reste encore beaucoup de travail, notamment pour la logistique.*

Kontañ a reomp kalz warnoc'h, war youl ha nerzh ar skipailhoù lec'hel hag an holl dud laouen da reiñ an dorn.

*Nous comptons beaucoup sur vous, sur la volonté et l'énergie des équipes locales et sur toutes les personnes qui voudront bien apporter leur aide.*

Fiziañs hon eus enno evit aozañ ar perzh a sell ouzh Ar Redadeg en o c'horn-bro.

*Nous avons confiance en vous pour organiser les actions locales sur votre territoire.*

Ne c'hellfe ket Ar Redadeg na genderc'hel na vevañ, ma ne vefe ket eus ar skipailhoù lec'hel-se.

*La Redadeg ne pourrait pas continuer et vivre s'il n'y avait pas d'équipes locales.*

Int-i eo a anavez o c'horn-bro, dezho d'ober brud, da vont da welet an tiez-kêr, da vont e darempred gant ar skolioù, gant ar c'hevredigezhioù, an tiez ar vro, gant an hiniennoù, ha kement hini a du da sikour ac'hanomp. Afer an holl eo Ar Redadeg.

*Ce sont elles, connaissant le terrain, qui feront la publicité, qui iront voir les mairies, qui iront solliciter les écoles, les associations, les maisons de pays, les particuliers et tous les acteurs de la réussite de la course. La Redadeg est bien l'affaire de tous.*

Ha gwir eo e vo ret domp mont war an dachenn d'ober bruderezh. Ret eo ivez ober a seurt da vezañ gwelet ha klevet war ar rouedad, er c'hazetennoù, ar radio, an tele, ar mediaioù dre vras.

*Et il va être nécessaire de faire de la promotion, il faut que nous puissions être vus et entendus largement sur les réseaux, la presse, la radio, la télé, bref tous les médias de communication possibles !*

C'hwi a oar mat, e plij deomp kenañ, da Jerald ha din me, bezañ gwelet gant tout an dud.

Traoù ouzhpenn a vo:

Filmoù bihan a zo da vezañ graet gant seveniñ ha tud all.

Ur bladenn a vo graet gant kanaouennoù ar redadeg, ur best of m' ho peus c'hoant.

Un defi selfi a zo lañset war facebook dibaoe un nebeut sizhunvezhioù dija .

*Vous savez bien qu'on adore, Jerald et moi, être vus par tout le monde... mais nous avons aussi des objectifs : Des clips vont être réalisés pour la promotion (Seveniñ et d'autres..)*

*Un CD va bientôt sortir, un best of des chansons des Redadeg.*

*Un défi Selfie lancé il y a quelques semaines et que nous allons valoriser*

Dibabet eo bet kanaouenn ofisiel Ar Redadeg, kanet ha lusket brav tre gant teir flac'h yaouank eus Douarnenez.

*La chanson officielle a été choisie, composée et interprétée avec talent par trois jeunes filles de Douarnenez.*

Gouelioù ha darvoudoù a vo aozet ivez, evit al loc'hañ e Kemper hag an degouezh e Plougerne evel just, met ivez, e meur a lec'h a hed an hent. Ret e vo brudañ anezho evit sachañ ar muiañ posubl a dud.

*Il y aura des fêtes et des événements qui seront organisés, pour le départ à Quimper et l'arrivée à Plouguerneau bien sur mais aussi tout au long du parcours. Nous les promouvrons le mieux et le plus largement possible.*

Un darvoud pobl e rank Ar Redadeg bezañ, digor d'an holl, plijadur gant ar re a gemer perzh o tiskouez o spi e dazont ar bzg.

*La Redadeg doit rester un événement populaire, ouvert à tous, offrant le plaisir pour les participants de montrer ainsi leur espoir pour l'avenir de notre langue.*

An holl amañ a oar mat petra eo palioù Ar Redadeg, kaout plijadur e brezhoneg, hag ivez evel just dastum arc'hant evit raktresoù e liamm gant ar brezhoneg, hag evit-se , an dra retañ eo gwerzhañ ar C'h/kmoù, an dafar (t-shirtoù, stammennoù, kasketennoù, pegsunioù, ...ha kement 'zo).

*Chacun connaît les objectifs de la course, avoir du plaisir en breton et bien sur aussi récolter des fonds pour soutenir des projets pour notre langue. Pour ce faire nous vendons nos kilomètres et des produits dérivés.*

Dibabet ez eus bet 8+1 raktres ar bloaz mañ gant kuzul ar re fur :

**8+1 projets ont été retenus par les sages**

– <b>Radio Kerne e Naoned</b> = ur radio 100% e Brezhoneg e Naoned	15 000 €
– <b>C'hwi a gano</b> (koulziad 2) = un heuliad war ar web	10 000 €
– <b>Ur greizenn dudi e Gwengamp</b>	10 000 €
– <b>Ar brezhoneg dre an hentoù treuz</b> = ur stummadur gant ar Fiselerezh e Rostren	7 000 €
– <b>An ingalded evit an holl</b> = stajoù hag atelieroù emzifenn gant merc'hed GAST	6 000 €
– <b>KANevedenn</b> = un abadenn evit ar re vihan	6 000 €
– <b>BEV, brezhoneg dre ar video</b> = skol digor en linenn	5 000 €
– <b>Ur bladenn best of an taol lañs</b>	3 000 €

Ar pezh a ra 62 000 € en holl evit ar raktresoù nevez ha kemend all evit Diwan, evel kustum, da lâret eo 124 000€ +1 raktres a oa bet dibabet e 2016 met kavet 'oa bet gwelloc'h daleañ aneahañ e 2018, neuze 134 000 en holl.

- **Bev bzh.** ur rouedad B&B evit ar vrezhonegerien 10 000 €

*Ce qui représente 62000€ pour les nouveaux projets, autant pour Diwan comme d'habitude soit 124000 € + 10000 € pour le projet sélectionné en 2016 et différé en 2018 : 134000€*

Spi hon eus e c'hellimp un deiz bennak reiñ 100% eus gwerzh ar Kmoù d'ar raktresoù ha da Ziwan.

Ar pezh a dalvez e vefe arc'hantet mont en dro Ar Redadeg gant an traoù all, da lavaret eo gant ar gounidoù diwar gwerzhañ dafar hag gant mesened da zont. Evit-se ivez eo bet krouet post kargadez a gehentiñ ha dioren, post nevez Tifenn. Evel m'eo bet lavaret dija gant Jerald.

*Nous espérons pouvoir un jour être capable de redistribuer 100 % de la vente des kms à Diwan et aux projets. Mais pour ce faire nous devons équilibrer l'organisation de l'événement en augmentant le bénéfice des ventes de produits dérivés et aussi développer notre capacité de mobiliser le soutien des partenaires et des mécènes. C'est sur ce dernier axe qu'a été créé le second poste de chargée de communication et de développement évoqué plus haut par Jerald.*

Brezhoneg liesliv : setu tem Redadeg 2018, da lavaret eo, diskouez pegen pinvidik eo ar brezhoneg en e liesseurt. Komzomp eus-se araok hag e-pad Ar Redadeg.

*Brezhoneg liesliv : les couleurs du breton, voici le thème de la Redadeg 2018. C'est à dire mettre en lumière la richesse et la diversité de notre langue, nous évoquerons ce thème avant et pendant la course.*

C'hwi oar mat ivez, e vo lidet 10 vloaz Ar Redadeg e 2018.

*Vous savez aussi que nous fêterons les 10 ans de l'événement en 2018.*

Ar 6 vet Redadeg e vo. Klask a reomp gwellaat ha kreskiñ eus un eil redadeg d'eben. Gwir eo, n'omp ket c'hoazh ken bras ha ken brudet hag ar C'horrika e Bro Euskadi, met fier e c'hellomp bezañ gant al labour graet abaoe 10 vloaz bremañ. Ha trugarez adarre deoc'h holl evit kement mañ.

*Ce sera la 6ème Redadeg, nous cherchons à améliorer et à croître à chaque Redadeg. C'est vrai que nous ne sommes pas encore aussi célèbre et immense que la Korrika au Pays Basque met nous pouvons être fiers du travail qui a été réalisé depuis 10 ans. Et nous vous remercions tous encore pour cela !*

Ur bodad tud 'zo c'hoazh o labourat war tem all, ur Redadeg kulturel. An 10 vloaz a vo un digarez evit lakaat Ar Redadeg kulturel e plas.

Ne vefe ket Ar Redadeg Kulturel nemetken e pad sizhunvez Ar Redadeg. Met kinnigoù a vefe graet a hed ar bloaz gant tud ar bodad-se ; tud o prederiañ war dazont Ar Redadeg evit kaout oustilhioù nevez ; evit buheziñ Ar Redadeg, pe c'hoazh sikour ar c'helenn, aozañ kolokoù ha meur a dra all diouzh ma vezo.

*Un groupe de travail avance sur le concept de Redadeg Culturelle et l'anniversaire des 10ans sera l'occasion de lancer l'idée plus avant.*

*Il s'agirait de faire vivre la Redadeg Culturelle au-delà de la semaine de son passage, des propositions pourraient exister entre 2 Redadeg, une réflexion sur l'avenir de la course et son animation, une réflexion aussi sur l'avenir de la langue, son enseignement, par exemple à travers des tables rondes ou des colloques.*

Ur galv a zo bet lañset gant Ar Redadeg. Ar galv-se a zo evit sevel ur seurt « katalog » evit krouiñ liammoù gant arzourien, sevel ur roll kanerien, strolladoù c'hoariva, sirk, muzisianed, livourien, skrivagnerien ....). Gant al listenn se, e vo aesoc'h d'ar skolioù, lakomp, gouzout piv 'ra petra er vro, ha goulenn diganto, marteze dont er skol evit krouiñ un dra asambles.

*Dans ce cadre nous avons lancé un appel aux artistes qui souhaiteraient participer lors de la Redadeg afin de réaliser une sorte de « catalogue » présentant des artistes (de théâtre, de cirque, des musiciens, des peintres, des écrivains, etc) pour aider les associations locales à trouver et diversifier leurs animations sur le passage de la course.*

Setu gant Ar Redadeg ez eus buhez, hag e vo muioc'h-muiañ c'hoazh, spi hon eus, a-drugarez deoc'h ha d'ho labour.

Evit hiziv, mersi bras deoc'h da vezañ selaouet ac'hanomp ha da vezañ chomet betek ar fin....

Emichañs n'omp ket bet re hir ha borodus, ha reiñ a ran ar gomz bremañ da Gatelin ha da Zenez evit kinnig deomp kontoù 2017 ha rakvudjed 2018.

*Donc avec la Redadeg il y a beaucoup de vie et d'animation et nous espérons qu'il y en aura de plus en plus grâce à la participation de tous.*

*Nous vous remercions d'être restés jusqu'au bout en espérant que nous n'avons pas été trop longs, nous allons maintenant regarder les comptes 2017 et le prévisionnel 2018.*